

# EUR pachipi neve

Sonet ha kanet gant GUILHOM LEON (Leon Braz),  
d'an 20 a viz ebrel 1943, ha dastumet gant Polig  
Monjarret.

♩ = 120

Eur pa-chi - pi ne - ve a zo deut da Gou-rin, MA-TI-LIN!

Hag an hi-ni 'n dañ - so a ren - ko be-zañ koant, ma p'eus c'hoant!

Pa-chi - pi ne - ve! Pa - chi - pi plin! Mont a rin!

Hag an hi-ni 'n dañ - so a ren - ko be-zañ den! MADA-LEN!

I

Eur pachipi neve a zo deut da Gourin ! Matilin !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ koant ! Ma p'eus c'hoant !  
Pachipi neve ! Pachipi plin ! Mont a rin !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ den ! Madalen !

## II

Eur pachipi neve a zo deut da Vefrand ! Gwin ardant !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ fin ! Herveline !  
Pachipi neve ! Pachipi kreñv ! Penn eur preñv !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ gerc'h ! Pok ar merc'h !

## III

Eur pachipi neve a zo deut da Gararez ! Eus ar maez !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ dik ! Butun chik ! (pe < kafe mik >)  
Pachipi neve ! Pachipi didrouz ! Bleo al louz !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ brao ! Lost an diaoul !

## IV

Eur pachipi neve a zo deut da Rostren ! Penn da benn !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ skañv ! 'pad an hañv !  
Pachipi neve ! Pachipi re hir ! N'e ket gwir !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ mistr ! Leun a chistr !

## V

Eur pachipi neve a zo deut da Gemper ! Paour kaez Per !  
Hag an hini a dañso a renko bezañ c'hwek ! Mesk ha mesk !  
Pachipi neve ! Pachipi flao ! Taol baz fao !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ klok ! Bastin Floch !

## VI

Eur pachipi neve a zo deut da Bariz ! Sant Deniz !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ skuiz, zod ha kriz !  
Pachipi neve ! Pachipi kamm ! Lamm ha lamm !  
Hag an hini 'n dañso a renko bezañ sioul ! Lost en toul !